

**Dizano. Santez Eoded.** Bet savet e fin an XIX<sup>ved</sup> kantved.  
Modernnaet eo bet an doare-skriva. Geriou galleg brezonekaet a zo, kement ha ma  
vez red gouzoud galleg evid kompren. Ha viou-koukoug 'zo.

## **Kantik spirituel**

### **War Buhez Santez Eoded**

### **ginidig a eskopti Leon**

War don *Gwerz Theophilus*

Klevit oll, tud yaouank a eskopti Leon,  
Klevit eur werz nevez a doucho ho kalon,  
Kompozet er bloaz-mañ en enor da Eoded,  
Eur Zantez a Leon, hervez ma'z eo skrivet.

A gastell Tremazan, e parrez Landunvez,  
Galon<sup>1</sup>, eun dijentil euz ar haerra lignez,  
A zeuas da eureuji, evid kenta pried,  
Merh eur Priñs euz a Vrest, Florañsa 'oa anvet.

Bugale o-devoe, mez oll ne anvan ket :  
Unan eo Sant Tangi, eun all Santez Eoded ;  
O-daou pa gomañsont kaoud uzach a rezon,  
Gand o mamm e oent desket da ober orezon.

Da britika 'r vertuz, chaseal ar pehed,  
Da dehel diouto evel diouz serpanted ;  
Ar pezh 'zo neseser a ree ar vugale,  
Evid, goude ar maro, mond da weled Doue.

Hogen ar maro kriz, dinatur hag ingrat,  
A lamas diganto o mamm zantel ha mad,  
A roas de', siwaz, eul lezvamm villiget,  
Karget euz a valis e-barz en o andred.

Eur bloaz goude maro demeuz a Florañsa,  
Galon e Bro-Zaoz<sup>2</sup> ah eas d'en em renta ;  
Eno eun dimezell souden a eureujas,  
Uhel a galite hag euz a valis braz.

O weled kement-se, e araj a greske ;  
Pa welas an noblañs a genta kalite  
O toned d'e reglask evid o eureuji,

---

<sup>1</sup> Galon : ano tad Eoded.

<sup>2</sup> e Bro-Zaoz : ne veze ket karet ar Zaozon en amzer-ze gand tud ar Frañs.

Hag a beb avañtaj o tond d'ò asuri.

Bete vremañ Eoded 'zo bet iñdiferant,  
Oll kement tra a zoufr heb neb damant ;  
Mez doned da zimezi biken ne gontsantje,  
Goude rei da Jezuz he horv hag heh ene.

Er feson-mañ dezañ eh adres he fedenn :  
Jezuz, va gwir bried, permetit e varvfen  
Kent eged birviken terri ar bromesa  
Pini<sup>3</sup> am-eus greet deoh hag a ratifian.

Ar valis euz he lezvamm a zervijas dezi  
Da ampech ma rankje dond da eureuji,  
O weled ez edo en eun istim ker braz,  
Prest pell diouz ar hastel war ar mêz he hasas.

Eno en eun tiig hag eñ meurbed dister,  
Bemdez heh orezon a ofre d'or Zalver,  
Ha kalz a euvrou mad bemdez eh egzerse  
En andred peb unan ha gwella ma helle.

Kalz a blahed yaouank a oa 'barz ar hanton  
Dre he skol, heh egzempl touchet en o halon,  
A renoñsas a-grenn da vaksimou ar bed,  
En em roas da Zoue dre garantez parfet.

Erfin he breur Tangi a Bariz distroet,  
E kastel Tremazan prest eo en em rentet,  
Hag heb e anavezoud er zal e oa konduet,  
E peleh<sup>4</sup> ma oa kalz a zimezelled.

Ha pa oa gand an oll gand respet saludet,  
Souden e houlennas peleh edo Eoded ;  
Ker buan e lezvamm e dennas a-gostez,  
O soñjal he hlaske evid ober al lez.

Neuze an dreitourez a lavaras dezañ :  
« Koves ar wirionez ouzoh a zeziran :  
An dimezell Eoded a zo eur plah kollet,  
'Zo eur prostituet a gement a gavfet.

---

<sup>3</sup> Pini : an hini.

<sup>4</sup> E peleh : el leh

Heh opstinasion, he buhez debardet,  
D'he has war ar mêz en-deus or hontregnet. »  
Hag e klask, allaz, golo gand gwelloh fasilite  
Gwalleur eun dimezell demeuz he halite.

O kredi re vuan, Tangi a zortias,  
Gand koler ar brasa e hoar baour a glaskas.  
E-kichenn eur feunteun o walhi he dillad,  
Evel ma he gwelas en he galvas timad.

Eoded, pa her hlevas a gomañsas tehed,  
Rag ma'z oa eñ ganti dianavezet ;  
Mez eñ ouz he foursui neuze prest he zapas,  
Ha gand eun taol kleze a-grenn he dibennas.

Pa oa kouezet d'an douar, o weled he bruched  
Karget a lêz-kaoulet heb gouzoud ar sujed,  
Diouz an amezeien neuze en em iñformas  
Euz a vuhez Eoded, ar pez hen estonas.

An dud oll glaharet a lavaras dezañ :  
« Bevet he-deus Eoded asur bete vremañ  
Gand pep seurt santelez, egzempl vad ar hanton ;  
Glahar vraz on-eus dezi euz a-greiz or halon. »

He lezvamm griz, allaz, he-deveus-hi chaset  
Euz a gastel he zad hag amañ baniset  
Gand pep seurt paourentez ; al lêz hoh-eus gwelet  
Da zoulaji ar paour e kuz 'oa destinet.

Pa en-devoa Tangi ar wirionez klevet,  
E oa dare dezañ mervel gand an despet,  
Gand keuz en e galon d'he beza dibennet,  
O kredi re vuan lezvamm gounnaret.

D'ar hastel e teuas da gaoud e dad Galon,  
En eur skuilla daelou euz a greiz e galon ;  
Pa antreas er zal e dad a rankontras,  
Ker buan d'an daoulin dirazañ en em strinkas.

Eno e lavaras : « me eo ho mab Tangi,  
A verit ar maro, hep kaoud neb damant din.  
Allaz ! siwaz, allaz ! va hoar vuia-garet  
Gand eun taol kleze am-eus bet dibennet. »

O ouela da Eoded pa oant eno o-daou,  
Al lezvamm 'oa en joa, gweled oll e kañvou ;  
Souden e-kreiz ar zal, Eoded a antreas,  
He fenn en he daouarn, eno eh aparisas.

Eno war he gouzoug he fenn a aplikas,  
Hag evel diagent outi en em stagas ;  
Kerkent ouz he lezvamm e tro publikamant,  
Hag evel-henn outi e komañsas parlant :

« Pep tra oll er bed-mañ en-deveus e amzer ;  
Doue beteg eur poent a zoufr gand ar peher ;  
O malis en-deveus souffret bete vremañ,  
Ema o prepari doned d'ho punisa.

Adieu eta, lezvamm dinatur hag ingrat,  
Deut eo an eur bremañ deom d'en em guitaad ;  
Greet eo ahanoh, prest eo koler Doue  
Da goueza war ho penn 'pad an eternite. »

Eur hren ken violant eno he hemeras,  
Heh antraillou, kouezet gand he zreid, a bresas ;  
Erfin gand heh araj d'an douar en em strinkas,  
Hag evel ma welot he buhez a finisas.

A-zioh ar hastel ar gurun o trouzal,  
A zeuas da sponta kement a oa er zal,  
Ker buan o kouezas e krevas an doenn,  
Hag heb ofañsi den, he loskas penn-da-benn.

An dud oll estonet a deuas da grena  
O weled eun Itron demeuz a-greiz he joa  
E-barz en eun iñstant e ludu 'oa rentet.  
Allaz ! hag heh ene livret d'an droug-spered.

Iñkontinant Eode ouz he breur a droas,  
Hag outañ publikamant evel-henn a gomzas :  
« Pa em gweljhoh, va breur, me n'hoh anavezen ket,  
Ar pezh a roas din gwir sujet da dehed.

Mez kuzul ol lezvamm a oun<sup>5</sup> ervad brema'  
Eo deoh ar sujet da zond d'am dibenna ;

---

<sup>5</sup> oun : ouzon

Hag rag-se ar Werhez 'm-eus pedet a galon  
Da houlenn evidoh digand Doue pardon. »

Ker buan d'an daoulin Tangi en em strinkas  
Ouz e hoar a galon pardon e houlennas ;  
« Pardon, va hoar, pardon d'ho peza masakret,  
Va halon gand glahar a zo kazi rannet. »

He oll zakramañchou goude e resevas,  
Hag e-barz eun iñstant adarre e varvas.  
Neuze, gand an êlez, d'an neñv e oe kunduet,  
Endra pado Doue da veza kurunet.

He horv goude a oe interet gand enor  
En parrez Landunvez peurdest da vord ar mor ;  
Eno he-deveus bet greet kalz a viraklou,  
Abaoe 'oa heh ene er gloar euz an neñvou.

Perag, oll, tud yaouank, koulz ha santez Eoded,  
Ne zentit ouz ho tud, renta dezo respet ?  
Perag ne andurot pa he-deveus anduret,  
Gand eul lezvamm gruel a-gement a gavfet !

Perag diouz ar pehed hag an okazion,  
Ne dehit koulz hag hi hag ober orezon,  
Pazeogwir ar Werhez rag an êl a spontas,  
Ha Santez Eoded rag he breur a dehas ?

Perag, pa'z oh frajil evel m'eo eur pod-pri,  
N'ho-pezo ket a spont hag er-mêz hag en ti ?  
Rag an okazion da goueza er pehed,  
E faot tehel outi, kalz a dud 'zo daonet.

O chom re dost d'an tan e teuer d'en em boazad,  
O chom dindan ar glao en em hlebier timad,  
Evid an okazion na gouezit ket er pehed,  
N'oun<sup>6</sup> nemed tri remed : tehed, tehed, tehed.

Tehit prest... ar maro bemdez a didosta,  
Mar gell ho sourpreno pa zoñjoh nebeuta ;  
Kalz euz a dud yaouank hoh-eus anavezet,  
Hag a-greiz o yehed o-deveus diskaret.

Keuz ho-pezo neuze faot da veza heuliet

---

<sup>6</sup> N'oun : n'ouzon.

An egzempl a vertuz euz a Santez Eoded ;  
Komañsit eta bremañ da veva evelti,  
Hag e viot en neñv kurunet koulz hag hi.

Pelloh eta pa viot gand ho tud gwall dretet,  
Ouz kastel Tremazan troit prest ho spered :  
Gand he lezvamm eno, petra 'soufr Eoded,  
Soñjit ha grit evelti, gand Doue 'viot paeet.

Ar werz-mañ 'zo dediet da yaouankiz Leon,  
En pehini<sup>7</sup>, mar keront, e kavint ar feson  
Da bratika ar vertuz, kared Doue a galon,  
Dre egzempl ar Zantez bevet en o hanton.

Itron Santez Eoded, bezit alvokadez  
Da yaouankiz Leon, heulia 'rint ho puhez.  
Oll, gwella ma hellint en amzer da zoned,  
Setu amañ ar hontrad ganto oll gwarantet.

Etrezom, tud yaouank, a eskopti Leon,  
Pelloh e prometom demeuz a wir galon  
Imita ar vuhez euz Santez Eoded,  
Evid goude 'r maro mond d'an neñv d'he gweled.

---

<sup>7</sup> En pehini : en hini.